

BIENVENUE À
**PLOUNÉOUR
MENEZ**

DONEMAT E
**PLOUNEOUR
MENEZ**



Les réponses à toutes mes
questions dans ma nouvelle école!

Ar respontoù da'm holl c'houlennoù
diwar-benn ma skol nevez !


Plouneour-Menez

LAT : 48.45 - LON : -3.8833

**LIVRET D'ACCUEIL DES NOUVEAUX ÉLÈVES
LEVRIG DEGEMER AR SKOLIDI NEVEZ**



MA NOUVELLE ECOLE

L'ÉQUIPE SCOLAIRE

MONOLINGUE

Classe maternelle : Aurélie DOLLO et Céline PERON (ATSEM)

CP/CE1/CE2 : Aline COAT (directrice) et Marion NEWBURY (le jeudi et vendredi)

CM1/CM2 : François BINET

BILINGUE

Classe maternelle / CP : Tiphaine KERDILES, Sonia HAVARD (le vendredi) et Christelle DIEZ (ATSEM)

CE1/CE2/CM1/CM2 : Kevin JAOUEN

AESH : Patricia

Pour nous contacter:

Rue Jules Ferry

29410 PLOUONEUR-MENEZ

02.98.78.94.65

ec.0291564t@ac-rennes.fr

L'ÉQUIPE PERISCOLAIRE

Responsable du service Enfance Jeunesse : Maïan PERROS

Animatrice périscolaire / Directrice ALSH : Gilcianne BRUNET

GARDERIE MATIN (7h30 à 8h35) ET SOIR (16h30 à 19h00)

Animatrices en garderie du matin : Céline PERON ou Christelle DIEZ

Animatrices en garderie du soir : Fanny FAOUEN et Karen OLLIVIER

TEMPS DU MIDI (11h45 à 13h30)

Animatrices le midi primaires : Fanny FAOUEN, Karen OLLIVIER

Animatrices le midi maternelles : Gilcianne BRUNET, Céline PERON ou Christelle DIEZ

ALSH (7h30 à 18h30)

Animatrices le mercredi à l'ALSH : Gilcianne BRUNET et Fanny FAOUEN

Entretien des locaux : Frédérique BILIEU

Pour nous contacter:

Rue Jules Ferry

29410 PLOUONEUR-MENEZ

02.98.78.94.50 - 06.77.58.07.07

www.plouneour-menez.bzh

ti-gwer@plouneour-menez.bzh



MA SKOL NEVEZ

SKIPAILH AR SKOL

UNYEZHEK

Klas ar skol-vamm : Aurélie DOLLO ha Céline PERON (GWATASM)

KP / KD1 / KD2 : Aline COAT (renevez) ha Marion NEWBURY (d'ar Gwener)

KE1 / KE2 : François BINET

DIVYEZHEK

Klas ar skol-vamm / KP : Tiphaine KERDILES, Sonia HAVARD (d'ar Gwener) ha Christelle DIEZ (GWATASM)

KD1 / KD2 / KE1 / KE2 : Kevin JAOUEN

SBS : Patricia

Evit dont e darempred ganeomp :

Straed Jules Ferry
29410 PLOUENOUR-MENEZ
02.98.78.94.65

ec.0291564t@ac-rennes.fr

AR SKIPAILH TROSKOL

Karget eus ar servij Bugale Yaouankiz : Maïan PERROS

Buhezourez troskol / Renerez DDHH : Gilcianne BRUNET

DIWALLEREZH DA VINTIN (eus 7e30 da 8e35) HA DA NOZ (eus 4e30 da 7e00)

Buhezourezed en diwallerezh da vintin : Céline PERON pe Christelle DIEZ

Buhezourezed en diwallerezh da noz : Fanny FAOUEN ha Karen OLLIVIER

DA BOENT KREISTEIZ (eus 11e45 da 1e30)

Buhezourezed da greizteiz er c'hentañ derez : Fanny FAOUEN, Karen OLLIVIER

Buhezourezed da greisteiz er skol-vamm : Gilcianne BRUNET, Céline PERON pe Christelle DIEZ

DDHH (eus 7e30 da 6e30)

Buhezourezed d'ar Merc'her en DDHH : Gilcianne BRUNET ha Fanny FAOUEN

Kempenn ar salioù : Frédérique BILIEN

Evit dont e darempred ganeomp :

Straed Jules Ferry
29410 PLOUENOUR-MENEZ

02.98.78.94.50 - 06.77.58.07.07

www.plouneour-menez.bzh

ti-gwer@plouneour-menez.bzh






DES PROJETS

Eco-Ecole

L'école publique est labellisée éco-école, un programme international d'éducation au développement durable. C'est une opportunité pour les élèves de Plouneour d'être sensibilisés dès le plus jeune âge aux enjeux de la protection de la planète et de ses ressources.




Eko-Skol

Labelizet eo ar skol publik evel eko-skol, a zo ur programm etrebroadel evit an deskadurezh d'an diorren padus. Un digarez eo da sachañ evezh bugale Plouneour, adalek an oad tenerañ, war ar pezh a sell ouzgwarezñ ar blanedenn hag an danvezioù a zo enni.

La médiation par les pairs

Les médiateurs/trices sont des élèves volontaires de l'école, formés à la médiation. Ils reçoivent, des camarades après un conflit. Ils ont pour mission d'instaurer la parole, comme moyen de résoudre des problèmes.



An hanterouriezh gant ar genseurted

An hanterourien/ezed zo anezho skolidi youlek eus ar skol, bet stummet d'an hanterouriezh. Resev a reont o c'hamaladed goude un tabut bennak. O c'hefridi eo broudañ ar skolidi da gomz etrezo evit diluziañ kudennoù.

Des délégués de classe

Chaque délégué, élu en début d'année, représente sa classe et a pour rôle de faciliter la communication entre les élèves et les enseignants. C'est un acteur important de la vie de l'école.



Dileuridi ar c'hlasad

Pep dileuriad, bet dilennet e deroù ar bloaz, a vez oc'h ober en anv e glasad abalamour da aesaat an darempredoù etre ar skolidi hag ar skolaerien. Obererien bouezus int evit buhez ar skol.

RAKTRESOÙ

Ateliers méridien

Ces ateliers sont proposés par l'équipe périscolaire et se déroulent entre 13h et 13h30. Ils sont en libre accès.

A chaque récréation, les élèves ont accès à la structure de jeux, le terrain de sports, les paniers de basket...

Selon la météo, du matériel et d'autres espaces sont mis à disposition : cubes de construction, bac à sable...




Atalieroù da greisteiz

Kinniget e vez an atalieroù-mañ gant ar skipailh troskol etre 1 eur hag 1 eur 30. Digor int d'an holl pa garont. E-kerzh an ehanoù e c'hell ar skolidi implijout an tachennoù-c'hoari, an dachenn sport, ar paneroù basket... Diouzh liv an amzer ez eus dafar ha lec'hioù all : diñsoù evit c'hoarioù sevel, poull traezh...

Charte du vivre ensemble

La charte du vivre ensemble a été élaborée par les enfants et l'équipe périscolaire lors d'ateliers sur les temps méridiens.

C'est un écrit qui protège l'exercice des libertés et qui permet d'effectuer un lien entre l'élève, l'ensemble de l'équipe et sa famille.



Karta ar bevañ asambles

Savet eo bet karta ar bevañ asambles gant ar vugale hag ar skipailh troskol, e-kerzh atalieroù da boent kreisteiz.

Graet eo ar skrid-mañ evit gwarantñ ma vo doujet d'ar gwirioù ha skoulmañ liammoù etre ar skoliad, ar skipailh a-bezh hag e familh.

Le jardin partagé

Le jardin partagé est un espace mis à disposition des enfants, c'est :

un lieu d'éducation à l'environnement pour les enfants et les habitants : **un jardin pédagogique.**

un lieu de partage et de rencontre intergénérationnelle : **un jardin intergénérationnel.**

un lieu de vie et d'animation dans le bourg ouvert à tous : **un jardin public**



Al liorzh lodennet

Ul lec'h graet evit ar vugale eo al liorzh lodennet:

ul lec'h deskadurezh war an endro, evit ar vugale hag e annezidi : **ul liorzh pedagogel.**

ul lec'h d'an holl remziadoù da gejañ etrezo ha d'ober traoù asambles : **ul liorzh etre remziadoù.**

ul lec'h evit degas buhez ha dudi er bourk, digor d'an holl : **ul liorzh foran.**

SERVICE PERISCOLAIRE

Ti Gwer



PROJET ENFANCE JEUNESSE

Un projet concerté et partagé par les acteurs de la vie locale à destination des enfants et des jeunes. Ce projet reflète nos valeurs et la vie de notre territoire. Il a pour objectif de fédérer parents, partenaires, élus et associations afin que la coéducation devienne une valeur forte à PLOUNEOUR MENEZ.

Un projet comme outil d'animation de la vie locale afin de construire une dynamique de territoire.

Un projet qui permet d'améliorer l'articulation des différents temps de l'enfant afin de lui permettre de mieux tirer parti de son temps scolaire et de son temps libre. Mieux se connaître, être ensemble lors d'activités culturelles, sportives ou ludiques, peut être l'occasion pour chaque enfant de se découvrir des talents et contribuer à la réussite de sa scolarité, à s'enrichir.

Un projet pour aider les enfants à grandir sur notre territoire, à rêver, à se créer de nouveaux horizons et à oser. Ouvrons le champ des possibles !

Santé/bien être

- Éduquer à la santé
- Développer l'estime de soi et la confiance en soi
- Favoriser les pratiques sportives

Education à la citoyenneté

- Sensibiliser à l'environnement et à ses enjeux
- Initier à la citoyenneté, responsabiliser
- Favoriser l'expression, le débat, le choix

Epanouissement, réalisation de soi

- Développer les pratiques artistiques et culturelles
- Promouvoir la coéducation
- Favoriser les activités de découverte et d'expérimentation



SERVIJ TROSKOL

Ti Gwer



Ti Gwer
Plouneour-Menez

AR RAKTRES BUGALE YAOUANKIZ

Gant an dud a gemer perzh e buhez ar gumun eo bet prientet ar raktres-mañ evit ar vugale, hag ar re yaouank, ha ganto e vez kaset da benn. En ober-mañ e kaver ar pezh a zo pouezus evit hor c'humun, ar pezh a ya d'ober he buhez. Ar pal eo bodañ tud ar vugale, ar gevelerien, an dilennidi hag ar c'hevredigezhioù abalamour d'ar c'hendeskiñ da vezañ un dra a bouez bras e PLOUNEOUR MENEZ.

Ur benveg eo evit degas buhez er gumun, evit reiñ lañs dezhi.

Ur raktres abalamour d'ar mareoù a ya d'ober buhez pep bugel da vont gwelloc'h an eil re gant ar re all, d'ar vugale da dennañ gwelloc'h splet eus o amzer er skoliad hag eus o amzer vak. Anavezout gwelloc'h an eil egile, bezañ asambles da geñver abadennoù sevenadurel, sport pe c'hoarioù, a c'hell lakaat pep bugel da gompren ez eo barrek d'ober traoù zo ha neuze sikourd'ober berzh er skol, ha da zeskiñ traoù nevez.

Ur raktres eo evit sikour ar vugale da greskiñ en hor c'humun, da hunvreal, da lakaat o spered da vont pelloc'h ha da grediñ ober. Digoromp an nor d'an ijin !

Yec'hed / hevoud

- Deskiñ d'ar yec'hed
- Diorren istim an unan hag an emfiziañs
- Broudañ ar vugale d'ober sport

Deskadurezh d'ar geodedouriezh

- Sachañ o evezh war an endro hag an dalc'hoù liammet outañ
- Deskiñ diazezoù ar geodedouriezh, kompren e ranker respont evit ar pezh a reer
- Aesaat d'ar vugale embann o soñj, kendivizout, ober dibaboù

Bezañ en e vleud, sevenedigezh an unan

- Diorren an oberoù arzel ha sevenadurel
- Broudañ ar c'hendeskiñ
- Aesaat an obererezhioù evit anaout hag hag arnodiñ traoù nevez



ALSH : Accueil de loisirs

Gilcianne, Fanny et Karen accueillent les enfants de 3 à 11 ans à l'accueil de loisirs Ti Gwer :

Durant la période scolaire : les mercredis de 7h30 à 18h30

Durant les vacances : du lundi au vendredi de 7h30 à 18h30 (Fermeture la semaine entre le décembre et 1er janvier)

Projet enfants-acteurs

A l'ALSH nous ne proposons pas de programme fixe d'activités, à l'exception des sorties et des ateliers menés par des intervenants extérieurs. Toutes les activités sont choisies lors des réunions avec les enfants. Ils sont inclus de manière active dans le choix des animations.

L'ESPACE JEUNES

Maian et Gilcianne accueillent les jeunes de 12 à 17 ans (dès la 6ième)

Durant la période scolaire : Accueil libre les mardis de 17h à 18h30 et vendredis de 17h à 20h30

Durant les vacances : selon les animations proposées par les jeunes (animations en journée complète, en demi-journée , en soirée)

SÉJOURS

Deux séjours sont proposées durant l'été :

Séjour Ados 11-17 ans : fin juillet

Séjour enfants 6-10 ans : début août

Sous souhaitez découvrir les joies du camping avec vos copains, nous proposons chaque année des séjours à partir du lundi au vendredi avec les animateurs que vous côtoyiez toute l'année.



TARIFS :

Afin de permettre à un plus grand nombre d'enfants de partir en vacances et de profiter d'activités de loisirs, la municipalité propose des tarifs en fonction de votre quotient familial.

DDHH : Kreizenn-dudi

Degemeret e vez bugale etre 3 hag 11 vloaz er greizenn-dudi Ti Gwer gant Gilcianne, Fanny ha Karen :

E-pad an amzer skol : diouzh ar merc'her etre 7e30 ha 6e30 g.m.

E-pad ar vakañsoù : eus al Lun d'ar Gwener etre 7e30 ha 6e30 g.m. (serret e vez e-pad ar sizhun etre miz Kerzu hag ar 1^{añ} a viz Genver)

Ar raktres bugale aktored

En DDHH ne ginnigomp ket eur programm termenet en a-raok, estreget ar pourmenadennoù hag an atalieroù kaset da benn gant buhezourien eus an diavaez. An holl obererezhioù a vez dibabet e-kerzh an emvodoù gant ar vugale a gemer perzh da vat evit sevel ar programm.

KORN AR RE YAOUANK

Degemeret e vez ar re yaouank etre 12 ha 17 vloaz (adalek ar 6^{vet} klas) gant Maian ha Gilcianne

E-pad an amzer skol : Pa garer d'ar Meurzh etre 5e ha 6e30 g.m. ha d'ar Gwener etre 5e hag 8e30 g.m.

E-pad ar vakañsoù : hervez an abadennoù kinniget gant ar re yaouank (abadennoù evit un devezh a-bezh, evit ur penn-devezh, da noz)

CHOMADENNOÙ

Div chomadenn a vez kinniget e-kerzh an hañv:

Chomadenn ar grennarded 11-17 vloaz : dibenn miz Gouere

Chomadenn ar vugale 6-10 vloaz : deroù miz Eost

Ma fell deoc'h anaout plijadurioù ar c'hampiñ gant ho mignoned e kinnigomp deoc'h bep bloaz chomadennoù eus al Lun d'ar Gwener gant ar vuhezourien a zarempredit a-hed ar bloaz.



PRIZIOÙ :

Evit ma c'hellfe un niver brasoc'h a vugale mont da vakañsiñ ha profitañ eus obererezhioù dudi, e kinnig an ti-kêr prizioù hervez ho rannad tiegezhel.

DES ACTIVITÉS DANS MA COMMUNE


ABADENNOÙ A VEZ EM C'HUMUN



Arts plastiques
Arzoù neuziañ




Foot
Mell-droad



Cirque/Dessin
Association l'Obelle
Sirk / tresañ Ar
gevredigezh L'Obelle



VTT—A mi chemin
Marc'h-houarn treuz bro



Pétanque / Petank



Musique : Harpe
Sonerezh : Telenn



Association des parents
d'élèves – APE
Kevredigezh Tud ar Vugale

LES COORDONNÉES DES ASSOCIATIONS SONT
DISPONIBLES SUR LE SITE INTERNET :

www.plouneour-menez.bzh ou
directement à la Mairie

CHOMLEC'HIOÙ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ ZO WAR AL
LEC'HIENN INTERNET :

www.plouneour-menez.bzh pe war-eeun en ti-kêr



Association / Ar
gevredigezh Artatak

Jardin partagé : Des animations tout
au long de l'année

Liorzh lodennet : Abadennoù a-hed ar bloaz



Bibliothèque municipale
Levraoueg-kêr

Mercredi : de 10h à 12h et de 15h à 17h
Merc'her : etre 10e ha 12e hag etre 3e ha 5e

Dimanche : de 10h à 12h
Sul: etre 10e ha 12e



Activités à faire sur ma commune ...



Aire de jeux de Plouneour-Menez : Toboggan, balancelle, aire de pique nique...

Jardin partagé : Potager, exposition, animations, aire de pique nique,...

Pôle culturel : Expositions

Le stal : ateliers tout au long de l'année

Randonnées : Balade de l'abbaye (11km), circuit des Roc'h (15km), sentier des mémoires (2 km), sentier de la montagne (11km),...

Abbaye du relec : jardin, étangs, ...



Activités à faire à l'extérieur de ma commune...

Aire de jeux de Pleyber-Christ : Terrain multisport, espace de glisse, aire de pique-nique...

Parcabout du domaine du Treuscoat à Pleyber-Christ_: 500 m2 de terrain de jeux tendus entre les arbres, balades à poney, sentiers forestiers...

Cinémas : Huelgoat, Landivisiau, Morlaix

Piscine : Landivisiau, Plourin Les Morlaix

Bowling : St Martin des Champs

Structures de jeux gonflables : Landivisiau, St Martin des Champs, Plourin Les Morlaix.

Domaine de Menez Meur : Hanvec Parc animalier

Lac du Drennec Sizun-Commana : plages, jeux, aire de pique-nique, activités nautiques

Livret élaboré par l'équipe périscolaire 2023-2024
Des remarques ? n'hésitez pas !

Traduction par Office public de la langue bretonne



Obererezhioù d'ober em c'humun...



Tachenn-c'hoari Plouneour-Menez : tobogan, brañsigell, korn piknikañ...

Liorzh lodennet : liorzh-legumaj, diskouezadeg, abadennoù, korn piknikañ...

Pol sevenadurel : Diskouezadegoù

Ar Stal : atalieroù a-hed ar bloaz

Baleadennoù : baleadenn an abati (11km), hentad ar Roc' eñvorennoù (2 km), hentad ar menez (11 km)...

Abati ar Releg : liorzh, lennoù...



Obererezhioù d'ober en diavaez da'm c'humun

Tachenn-c'hoari Pleiber-Krist : tachenn liessport, leurenn riklañ, korn piknikañ...

Ar Parcabout e domani Treuskoad e Pleiber-Krist : un dachenn-c'hoari 500 m² stignet etre ar gwez, baleadennoù war boneed, gwenodennoù er c'hoadoù.

Sinema : an Uhelgoad, Landivizio, Montroulez

Poull-neuial : Landivizio, Plourin-Montroulez

Bowling: Sant-Martin-war-ar-Maez

Frammoù-c'hwez : Landivizio, Sant-Martin-war-ar-Maez, Plourin-Montroulez.

Domani Menez Meur : Hañveg Park loened

Lenn an Drenerg Sizun-Kommana : traezhennoù, c'hoarioù, korn piknikañ, bageals



Savet eo bet al levrig-mañ gant ar skipailh troskol 2023-2024

Evezhiadennoù ? Na chomit ket etre daou !

Troidigezh gant Office publik ar brezhoneg